



Unvaniezh Skrivagnerien Breizh
Kenstrivadeg Varzhoniezh 2025

Reoliadur

Mellad 1 :

Ur genstrivadeg varzhoniezh a zo aozet gant Unvaniezh Skrivagnerien Breizh. Digor eo d'an dud deuet (skrivagnerien bet embannet ganto testennoù endev, pe amatourien), eus deiz kentañ miz C'hwevrer 2025 betek ar bemzek a viz Meurzh 2025, deiziad kas diwezhañ.

Mellad 2 :

Savet e vo ar barzhonegoù war ar penndodenn bet dibabet gant an unvaniezh evit 2025 : « Ur c'horn bihan eus Breizh ».

Mellad 3 :

Un destenn hepken a vo kinniget gant pep den a gemero perzh er genstrivadeg-mañ. Gwerzaouet e vo e gwerzennoù reizh pe savet en ur stumm frank. Etre dek ha daou-ugent linenn e vo ment ar barzhoneg. Bizskrivet e vo en nodrezh « Times New Roman » (ment 12, etrelinenn 1,5, marz-pajenn boutin 2,5, follenn A4). Kaset e vo er stumm PDF da ecrivainsbretons@orange.fr, en ur venegiñ anv ar skrivagner, e anv-bihan, e niverenn-bellgomz, e chomlec'h-post hag e bostel.

Mellad 4 :

Testeniet eo eveljust gant an aozer e kas ur skrid-orin, un oberenn diembann, bet savet gantañ. Arabat kas testennoù bet savet gant ar poell kalvezadel (« an I.A. »).

Mellad 5 :

Digoust eo ar genstrivadeg-mañ. Gant ar juri e vo dibabet tri emstriver a vo loreet gant prizioù da geñver Emvod meur Unvaniezh Skrivagnerien Breizh a vo aozet d'ar Sadorn 12 a viz Ebrel 2025 e Sant-Yagu-an-Enez (St Jacut de la Mer). Ar berzhidi a ouestl arvestiñ ouzh lidoù ar prizioù, pe a gasont un den hen raio evito.

Asantiñ a ra pep perzhiad e vo e destenn (loreet pe get) embannet en un dastumadenn a vefe savet gant an Unvaniezh A.E.B, he devo an droed d'ober un dibab, hep mirout an holl destennoù. An aozer a asant reiñ an aotre-embann hep gounit arc'hant evit e wirioù. A-hend-all, perc'henn war e oberenn, droed en deus d'implij anezhi evel ma plijo gantañ. Roet e vo (ma'z eus tu gant an Unvaniezh dont a-benn d'embann an dastumadenn-se) ur skwerenn da bep aozer barzhoneg bet dibabet, en do goulennet da zegemer anezhi.

Mellad 6 :

Aozet e vo ar juri gant pemp den bet choazet gant an Unvaniezh. Dezho e vo kinniget testennoù

dizanv. Dibabet e vo ar barzhonegoù diwar o stumm ha diwar ar mennozhioù estaolet.

Mellad 7 :

Hep engalv e vo diviz ar juri. O kemer perzh er genstrivadeg-mañ e vez asantet d'ar reoliadur en e bezh, dievezh a-gostez. Mirout a ra an Unvaniezh an droed da gemmañ pe nullañ ar genstrivadeg-mañ.